

# Fontanella



ARVEST BREZOUNEK

E PEVAR DIVIZ

Great

Gant F. GOYEN

Lakeat e Brezounek

Gant « BREIZAD »



Priz :

Dek kwennek



An dud a vezo gwelet er Pez-C'hoari



JEAN VILLEROUAULT, dichentil euz ar Ponte-Kroaz.

AN ITRONN VILLEROUAULT (an Diskiantez), e vaim.

MICHEL, servicher koz Villerouault, prizounier tec'hed euz enezén Tristan.

FONTANELLA, gouarnour Douarnenez.

AMAURY, breur Fontanella.

DE HOMAN, bet letanenn gant Fontanella.

HENRI IV, Roue Franç.

LAVARDIN, dichentil euz palez ar Roue.

DE ROSMADEC, kabiten armeou ar Roue, dichentil euz ar Ponte-Kroaz.

HERVE, touller beziou.

QUILLIG, spier gant Amaury.

BARNERIEN, eun Embamer, Boure'hisien, soudardet.



80<sup>e</sup>  
FONTANELLA



ARVEST BREZOUNEK

E PEVAR DIVIZ



KENTA DIVIZ

**Gwered ar Ponte-Kroaz**

(Er penn pella, an Iliz — a zeou ag a gleiz, beziou ag eur vezen bennag.)

HERVE, an touller beziou, gant eur ball

Nag a zonjou trist em spered, ken aliez gwech m'a ra d'inn ar maro dont ama da doulla eur bez bennag. — Atao ag a bep tu dirazoun, ne velan nemet tud distrujet gant Fontanella. — En eun taol, en deuz kouls lavaret karget ar vered.

Aze, ar re a zo bet lazet er ru *Cher*. Aze c'hoaz, ar re a gredas d'he bromessaou da veza lezet ho buez gantho, ag a zo bet oll krouget dre e urziou. Nag a re all ivez, kollet marteze da virviken; ar re vella euz ar Ponte-Kroaz; en ho zoutez va mignoun Michel, servicher koz an Aotrou Villerouault.

Ann den fall !! ho stlejet en d'euz beteg pri-



sounniou tenval enezen Tristan, ag abaoue den n'en deuz klevet grik anezho.

Oh! nag eüruz int c'hoaz ar re ho deuz brema ar peoc'h er vered-ma!

(*Len a ra var ar beziou.*) An Aotrou Villerouault, krouget dre draisoni er Ponte-Kroaz, dre urziou Fontanella. Pebez koll!!... Ag en anzao a rankan, e vab Jean ne zonzj ket kals dere'hel e blaç na bale var e roudou.

(*O len a nevez.*) An Aotrou Jean Cosquer, persoun Pouldreuzic, krouget er Ponte-Kroaz dre urzicu Fontanella. Ah! setu eno eun den, a n'en devoe ket aon da vervel.

II

(*Michel a erru er wered, en em zaoulina a ra war bez ar c'habiten Villerouault*)

HERVE, *en eur e veled*

Assa, petra velan-me? Va daoulagad n'am faziont-hi ket?? Daoust a n'eo ket Michel a velan?

(*Michel a zav.*) Ah! Michel, va mignoun koz!!

MICHEL, *servicher koz Villerouault, prisounier tec'hel euz enezen Tristan.*

MICHEL

Va mignoun Herve!

HERVE

Pebez joa d'as velet adarre, rag me da grede maro e prisounniou enezen Tristan. — Na da e'houzanv e peuz bet goulskoude,

rag goasseat out oll. — Mez lavar dinn buen penaoz e peuz gellet tec'hat?

MICHEL

Penaoz?... Anaout a riz, a dra zür, ar c'helou souezus. Fontanella en deuz bet digant ar Roue, ar bromessa eo pardounnet dezhan e oll dorfejou.

HERVE

E guirionez, ar vrud-ze a zo dre ama.

MICHEL

Ia, pardounnet e oll dorfejou spountuz, e oll drubarderez. Dizonjal a reer en deuz laeret a kasset gathan Marie a Vezarnou; en deuz lazet labourerien Plogastel, devet Iliz Penmarc'h, distrujet tud ar Ponte-Kroaz. — Kaeroc'h zoken, gant ar fizians da gaout emhan hiviziken eur zervicher mad a leal, ar Roue en deuz e hanvet gouarnour Donar-nenez.

HERVE

Piou? Fontanella? mez meritet en deuz beza krouget ugent kuech, ag ouспен!...

MICHEL

E vreur, an Aotrou Amaury, eo en deuz bet kement-ze d'ezhan; morse an trubard n'en defe kredet evelep tra... Setu 'ta, deac'h, e zoa gouel bras en enezen Tristan, evit enori eur c'helou ken mad. — Dibri ag efa-mad a oe greet pell en noz — ar goardou a ioa mezo.....



HERVE

A te e peuz kemeret an teac'h ?

MICHEL

A dra zùr — ..... hep beza gwelet oun skrimpet war ar mogeriou, a war neñv oun deuet d'an douar.

HERVE

Ag ar vignounet all, penaoz e m'aint-hi?...

MICHEL

Ar re all!... duont e m'aint, da viana ar re n'int ket maro dre ar poaniou krissa!....

A c'hoaz marteze, eo ar re-ze ar re eürussa, rag ar re a zo c'hoaz beo ne ket beva a reont. Ah! Herve pebez buez evitho!

A veac'h bevet, a veac'h gwisket, n'int nemet sklavourien Fontanella; ato chadennet, nemet karget e veñt da zavel mogeriou evit difen an den digaloun-ze.

HERVE

Na trist eo kement-ze!... Mez, daoust ha n'elfemp ket eun dra bennag evitho?

MICHEL

Fizians vad e m'euz... An Itroun Ville-rouault a c'hell kals evitho.

HERVE

An Itroun Villerouault!... Siouaz, diskiantez eo!

MICHEL

Diskiantez!.... Petra 'lavarez?

HERVE

Ia, maro e fried a dismegansou Fontanella, ho deuz great dezhi koll e fenn.....

Diskiantez!... Er gwelet a reer bemdez dre ar ruiou, trist, droug-livet, en e bleo füllet, o kana e foaniou. — An oll a dec'h diwar e hent, dre respect a dre enkrez, rag an intanvez baour!.... digas a ra an dristidigez en hor spered.

Ah! keit a ma vevo, birviken Ponte-Kroaz ne zijounjo euz krisder ag euz iudazerez Fontanella!

MICHEL

Diskiantez, petra 'lavarez?

HERVE

E mab Jean... ne anavez ket zoken anezhan... A dra zùr e kaf dezhi eo maro ivez, da gever an deiz spountuz-ze...

MICHEL

Ag en he zonzj ema venja e vamm, kastiza an torfetour, a renta d'e genvroiz ar frankiz ag al liberte?

HERVE

Ne ouz'oun netra. Ne lavar grik obed — ag aoun e m'euz, zoken, Michel, n'elfemp morze ober kals tra vad ganthan.

MICHEL

Petra?? a gouzanv a rasse, ep en em glem, e teuffe Fontanella da c'houarn ar vro-ma, en deuz ruziet dre ar goad? A n'en em zavo



ket a enep eun enor a roer da eun den disprijuz? A ne oar ket 'ta, eo bet touellet ar rouè, dre ardou e vreur Amaury ag e genderf Lavardin ??...

Assa, Herve, petra 'ta a zo c'hoarvezet epad m'edoun harluet en enezen Tristan?

HERVE

Petra zo digwezet? setu ama : Breur Fontanella, an Aotrou Amaury, a vel aliez Jean Villerouault. Dont a ra e unan ama, ag er pedi a ra da vont d'he velet, da gastel Beaumanoir. A dre vignouniach eo? pe dre interest? pe dre an eil ag egile? ne ouzoun ket. Lavaret a reer en deffe Amaury, eun den euz ar gvella, c'hoant dre e vadelez da lakaat Jean da zijounjal euz kement en deuz great e vreur Fontanella, d'he dad a d'he vam; ag kredi a ran eo deuet a benn euz e daol dre bromessaou a dre druferez.

MICHEL

Gounezet gant breur Fontanella !... Assa, mez kement-ze n'eo nemet traisoni !... Me a velo Jean, me va unan. En anavezet e m'euz en he yaouankiz, en luskellet e m'euz zoken, va zelaou a reïo. A ma red en e woaziet goad an Aotrou Villerouault, kement e peuz lavaret d'in aze ne zigwuezo ket. Nan, en toui a ran, Fontanella ne vezo ket pell amzer gouarnour Douarnenez.

*(Klevet a reer tud o vale)..*

MICHEL

Mez piou a zo dre aze, Herve? *(sellet a ra)*

Oh! va Doue! Amaury e unan gant De Romar, letannen-koz Fontanella...

Petra o deuz da ober ama? A dra zur kals ardou da zibuna da Jean Villerouault. Kerz ac'han, Herve... Red eo o lezel o unan, evit ma c'hellint komz essoc'h a ze. Me 'n em guzo ama, hag e klevin.

*(En em guzat a ra e kostez)*

III

AMAURY, *breur Fontanella,*  
DE ROMAR, *bet letanenn gant Fontanella*

AMAURY

Va brassa c'hoant oa gweled assemblez gan-ez ar c'hornadik douar-ma, stlabezet gant ar goad a reaz va breur skuilla varnezan. Ervez a zo d'in lavaret, te ive a loa ama, o vleina eul loden euz ar zoudardet e compagnunez La Bouille. Mad, pe gwir va breur ne fell ket dezhan diskleria d'in ar pez a zo c'hoarvezet, lavar d'in, te, kement a zo erruet.

DE ROMAR

Gwelloc'h e ve, Amaury, rei peoc'h var an traou-ze. Daoust ha n'ho peuz ket awalo'h gouzanvet?

AMAURY

Pegen poaniuz bennak ma c'hellfe boza evidoun an histor-ze, me a fell d'in e c'hlevet, a deski evelse kement a dlean da Jean Villerouault.



DE ROMAR

Assa ! a deoc'h eo renta kount deuz kement en deuz great ho preur ?

AMAURY

Petra fell d'id, mignoun ? en despet d'he wall oberiou, me gar c'hoaz anezhan, a va brassa ioul eo paea ar c'holl en deuz great. Allo, lavar d'in !

DE ROMAR

E toul-kear, ar c'hrogad a voe rust meur-bed. Goulscoude, o velet n'helle ket enebi ouz on tud, ar c'habiten Villerouault a en em dennaz gant e bried ag e zoudardet e tour Itroun Varia Roseudon. Aotrou persoun Pouldreuzik, Jean Cosquer, a ioa ive ganthan. N'ho devoa dizonjet netra evit gellout en em zifen.

N'euz fors deomp penaoz en em gemeret, n'hellemp dont a benn anezho ; na dre grogadou, na dre ar maged euz ar balan glaz c'houezet evit ho mouga.

AMAURY

An dud keiz !!!...

DE ROMAR

Neuze ho preur, droug ennan a kouls lavaret kounaret, a reaz dezho ar bromesa da gacout ho buez a da veza lezet e peoc'h. Er c'hredi a rajont var e c'her. Hogen, aveac'h m'oant diskennet euz an tour, ma oe kroget enno evit ho c'harga a jadennou ; ag ar re ne voent ket raktal lazet gant soudardet La

Boulle, a voe krouget ama zoken er vered-ma !!!...

AMAURY

Assa ! penaoz... Va breur, eun dijentil, a zo evelse eat a-enep e c'her ?

DE ROMAR

An Itroun Villerouault zoken ne voe ket espernet ; dirag e fried, dare da vervel, e voe great d'ezhi a bep seurt dismegansou. — Var an taol e kollas e fenn.

AMAURY

Tud digaloun, merzeria merc'hed zoken !... pebez dizenor evit va famill... Da viana an dud-ze a c'houzanvaz ar maro gant nerz kaloun ??

DE ROMAR

Mervel a rajont oll evel gwir zoudardet a gwir gristenien, goude an Absolven diveza dezho roet gant Aotrou persoun Pouldreuzik, ag en eur lavaret an eil d'egile : kenavo er Baradoz.

*(Peoc'h eur pennadik.)*

AMAURY

A kaout a ra d'id, De Romar, e c'hellfe morse Jean Villerouault kol ar zonzj euz kement all a grisder ?

DE ROMAR

Er c'hredi a ran, Aotrou ; rag n'en deuz gwelet netra euz an traou-ze. Jean a ioa d'an ampoent pell ac'hann, e ty e gerent. A neuze,



EIL DIVIZ

**Palez ar Roue**

I

AMAURY, LAVARDIN, *dichentil euz palez ar Roue.*

AMAURY

En lavaret a rean deoc'h, Lavardin, diredet oun buan-buan da Paris, rag an traou a ia fall. Quilliec, kasset d'ar Ponte-Kroaz gant De Romar evit kas or labour da benn, a zigas d'in kelachou souezus meurbed. Lavaret a ra d'in e zeus, dre a-hont, eur prisounier tec'het euz Enezen Tristan, ag a labour stard, eun neubeud deveziou 'zo, da lakaat Jean Villerouault d'en em zével en on enep. Ervez a lavar zoken, n'eo deuet nemet re-vad a benn euz e daol.

LAVARDIN

Penaoz ? daoust a ne gleven ket ac'hanoc'h o lavaret edoc'h sur euz Jean, oc'h ober dezan kredi a kaout fizians o peffe roet dezhan o merc'h Lena ?

AMAURY

Guir eo kement-ze, Lavardin. Dre ze, n'oun ket evit kompren penaoz en deffe Jean troet ken-buan a dilezet en eun taol ar pezh a rea e joa ag e garantez. Goassoc'h zoken, ervez a lavar d'in Quilliec, Jean a zo dija en hent, a marteze diguezet brema e Paris, evit

klask ar Roue, a rei dezan da anaout an oll rebechou savet a enep va breur Fontanella.

N'euz nemedoc'h, Lavardin, ag a c'helfe or savetei. Red eo deoc'h mont da gaout ar Roue.

LAVARDIN

Bezit dienkrez, kenderf. Ar Roue ne d-ei ket a enep e c'her ; anaout a ra pell 'zo an oll rebechou a reer d'ho preur Fontanella, a fizians bras en deuz e roio dezan skoazel en amzer da zont. Bemdez, gant laouennedigez e komz euz nerz kaloun Fontanella ag euz hardizegezh e zoudardet. Re a ezoum en deuz anezhan, evit e derri euz e garg ag en em zizober euz e skoazel, dreist-oll brema, abalamour da draisoni Biron.

AMAURY

Siouaz !

LAVARDIN

Petra 'ta ?

AMAURY

Va breur, eur skoazel a enep Biron ?... Muioe'h a aon e m'euz na vesse a du gathan.

LAVARDIN

Petra livirit ?

AMAURY

Ah ! Lavardin ! evit ober d'in poan ag anken, ne lez tro ebet da dremen. D'am daou-ugent vloaz, en deuz great diouzin eun den koz a kant mil dorret. A goulseude e kredan e c'hellin, ar vech-ma c'hoaz, miret outhan da goueza er follentez a leverer.



LAVARDIN

Daoust a Jean a anavez an draisoni-ze ?

AMAURY

Er c'hredi a ran stard. Ar prisonier-ze, tec'hed euz Enezen Tristan, a dlle anaout mad ar pez a glaske va breur. N'oun e doare all ebed evit koumpren e ve deuet Jean, ken prim a tra, da drei kein a d'am dilezel... Ah ! m'ar gelfen komz outhan, digas dezan da zonz euz e bromessaou, kreski e fizians, nerzusaat e garantez evit Lena !! Mez, e peleac'h e gaout ? Marteze en deuz dija gweled ar Roue pe Rosmadec A ne ouzoc'h-hu netra, Lavardin ?

LAVARDIN

Netra, evit c'hoaz, kenderf. Mez, bremaïe me am bezo eur c'helou bennag, rag galvet oun, gant De Rosmadec, da vont raktal da gaout ar Roue. Menek a vezo eno, hep mar ebed, euz kement a dleer ober a enep Biron. Komzet e vezo ivez euz ar re a en em zavas a enep ar Roue, euz ho preur marteze... a ma velan en deuz Jean great eun dra bennak, ag oma ar Roue e difizians ouz ho preur. .

AMAURY

Petra reoc'h-hu, Lavardin ?

LAVARDIN

Bezit sûr e vezin a du gant ho preur ag e tifennin ac'hanoc'h. Mez, ma c'hanavez ar Roue e draisoni, ne guzan ket ouzoc'h ho pefle neuze leac'h da gaout enkreuz. Er gou-

zout a ran, n'en devez De Rosmadec gelllet henvel ho preur gouarnour Douarnenez, nemet gant displijadur. Mar teu dezan gwelet sklerijen en asfer-ma, ep mar ne vanko ket da ziskar Fontanella. Ha goassa 'zo, ar Roue en deuz enghan ar vrassa fizians, a ne d'a nemeur a veach a enep dezhan. Evelato ..

AMAURY

Er savetci a reot, Lavardin !...

LAVARDIN

Evit c'hoaz n'euz netra gollet, Aotrou Amaury. En lavaret a ran deoc'h, ar Roue en d'euz fizians bras en ho preur. Red e vezo, evit hen lakaat d'e gastiza, rebechou a testiou kals sklearoc'h eged ar re digasset gant Jean Villerouault.

Ha n'euz forz petra zigwezo, e viot kemenet dustu. Chomit er gampr a velit aze e kichen, a ma vez ezoum ac'hanoc'h, me vunan ho kalvo da gaout ar Roue.

AMAURY

Trugarez deoc'h, Lavardin !...

LAVARDIN

Sellit ! setu ar Roue o tont... Gwelet a ran e m'a De Rosmadec en e gompagnunez. — En em dennit, Amaury. Renta ' rin deoc'h kount euz kement a zigwezo.



II

AR ROUE HERRI IV ; DE ROSMADEC,  
*kabiten armcou ar Roue, dichentil euz  
ar Ponte-Kroaz ; LAVARDIN.*

DE ROSMADEC

Evelse 'ta, goude eun tammik dispac'h a  
nec'hamant, ar vro a en em ro deoc'h,  
Aotrou?

AR ROUE

Ia, ar peoc'h a zistro e peb leac'h. Ar c'hen-  
vers a ia var vella, a var ar meaziou al la-  
bourou douar a zigas a bep tu madou ag  
eurusted. En lavaret e m'euz ; red eo e c'helfe  
al labourer douar lakaat, bep sul, e iar er  
pot. Ah ! red eo anaout, eur gwall-amzer a zo  
tremenet var ar vro ; epad eun nebeud bloa-  
vezioù, ar Franc a zo bet rannet etre diou  
loden, ep gellout en em glevet. Ar brezel-ze,  
great d'ar Religion, a lakeaz an dispac'h e pep  
leac'h. A bep kostez, ne velet nemet tud koun-  
naret, an eil o sailla var egile. Ah ! peur 'ta,  
ar Franczien a zesko an eil gouzav egile, a  
dougen respect da gredennou a da liberte ar  
re all ?...

DE ROSMADEC

C'houi, Aotrou Roue, eo a roio d'ar vro ar  
peoc'h ag an emgleo-ze.

AR ROUE

Fizians e m'euz, De Rosmadec. Gant joa e  
plij d'in aliez lavaret : e vezo eaz, gant tud  
euz o seurt evel kuzulerien a mignounet, dont

a benn euz al labour-ze. Ia, va brassa men-  
noz eo gwelet ar Franc unanet en diabars,  
evit beza krenvoc'h a enep enebourien an  
dianveaz. Evit kaout e mad en tu all d'ar me-  
neziou Alpes a Pyrénées, n'e d'euz ket re euz  
oll nerz e bugale, nag euz an ijin ag ar volon-  
tez vad a gaver atao en ho touez. Ar peoc'h ag  
an unvaniez, setu ar pezh a glaskin dre vade-  
lez a dre zouder. Ia, deuet eo an amzer da  
lakaat fin d'ar persecutionou, a miret ouz ar  
gwir Franczien d'en em hiskignat etrezho,  
en eur ho unani er garantez evit ho bro ag en  
eur ober d'ezho kompren e rankont e zervicha  
gant lealded a nerz-kaloun.

DE ROSMADEC

Ne dleomp hirio, Aotrou Roue, klask ne-  
met an unvaniez-ze. Drei-zi epken, Bro-C'hall  
a gavo e galloud ag e evurusted.

III

(*Eun hurcher a zeu er gampr.*)

AN HURCHER

Aotrou Roue, eun dichentil a c'houlenn komz  
ouz an Aotrou De Rosmadec.

LAVARDIN (*sioulik*)

Daoust a Jean Villerouault e velle ?

AR ROUE

It d'e gaout, De Rosmadec, mez ne zaleit  
ket. Dalc'hit sonj e tleit beza ama raktal.

DE ROSMADEC

Distrei a rin dustu, Aotrou Roue !



IV

AR ROUE; LAVARDIN

LAVARDIN

Kaout a ra d'in, eveldoc'h oc'h-unan, or bezo prestig ar peoc'h.

AR ROUE

Guir eo, Lavardin. En em zavet a enep d'in, evit miret ouz eur Roue protestant da c'houarn Bro-C'hall, an dud breman a zeu da zenti a da zuja d'in, abaoe m'oun en em c'hreat katolik.

Anaout a rann o doa abek da veza enep d'in. Ar Franc, eur rouantelez gatolik evel ma zeo, n'helle kaout eur Roue heretik. Na-c'hed e deffe, dre-ze, e enor ag e gloar tremenet.

Protestant dre c'hinivelez, eo bet red d'in anaout n'hellen, en despet d'am guiriou, beza Roue er Franc, rag ar raisoun-vad ag interest ar vro en difenne ouz-in. En em gontvertisset oun. Evit guir, epad pell amzer, an dud o deuz dalc'hed douetans varn'oun, o kredi e felle d'in ober eun dro kamm bennag. — Fazio a reant; n'e ket epken va interest en deuz great d'in kemeret an hent ze, va seiz ivez a zo hirio hevel euz hini kouls lavaret oll bugale Bro-C'hall.

LAVARDIN

O sujidi o deuz, Aotrou Roue, koumprenet mad an dra-ze.

AR ROUE

Ia, e peb leac'h e troont kein d'ho armou, evit anaout va galloud var ar vro. E Breiz-Izel zoken, an dug a Vereour en deuz digemeret va banniel ag en em lakeat e renk va mignounet. Guelloc'h c'hoaz, Fontanella, brudet ha gant raisoun-vad, evit an den falla e bro Kerne, a zo deuet ivez da zuja din a da anaout va galloud.

LAVARDIN

Kement-ze, Aotrou Roue, a zo eun testeni euz ho furnez, rag va c'hreden eo e teu Fontanella davedoc'h, a galoun vad ag gant eunder.

AR ROUE

Me gred ivez, Lavardin. Anzao a rankan, goulseoude, oun bet nec'hed epad pell amzer. Mez, Amaury ne ehane da lavaret d'in e vesse e vreur evidoun eur mignoun sur a fidel. Gouzout a ran va-unan eo Fontanella start en e volonte, ag ezoum or beuz euz eun den evelse var-dro Douarnenez, evit miret ouz ar Spagnolet da erruout a d'a en em skigna e Breiz-Izel. En em gela'hed eo ker mad en Enezen Tristan, ma ne c'heller en tiza, na dre vor na dre zouar.

Diou vech, var a glevan, gouarnour Brest en deveuz klasket kemeret an Enezen-ze, mez kollet en deveuz e boan ag e amzer. Dre vadelez, oun deuet da zijonjal euz e amzer tremenet, evit ober diouthan eur gouarnour evit Douarnenez.



LAVARDIN

Bezit sûr ne vanko ket da rei deoc'h eun testeni euz e volonteiz ag euz e anaoudegezvad.

AR ROUE

Va fizians eo. Ne zeus mui brema nemet Biron a gement a raffe d'in enkreiz. Anvet em b'oa anezhan gouarnour ar Bourgogn, a brema e teu d'am zraisa en eun doare iskiz. Aon e m'euz na zeuffe lod euz ar re a zo bet enep d'in da gemeret skouer varnezhan.

LAVARDIN

Aotrou Roue, an hini en deuz evit kabiten eur zoudard evel an Aotrou De Rosmadec, ne dle ket kaout aon o velet tud o sevel en e enep, a pa vent hevel ouz Biron.

AR ROUE

Var De Rosmadec, e guirionez, eo e kountan ar muia, evit lakaat fin d'an dispac'h. Ne m'euz ket guelloc'h kabiten egethan.

LAVARDIN

Eur Breizad eo, Aotrou Roue.

AR ROUE

Ia, Breizad dre ouenn. Euz ar Ponte-Kroaz, ar c'horn pella em rouantelez. Den a stad, evel an oll Vreizis, dispount a madelezus, leal euz ar pen.

*(Rosmadec a zigwez.)*

V

AR ROUE; DE ROSMADEC; LAVARDIN

AR ROUE

Ac'hanta, Aotrou Comt?

DE ROSMADEC

Eun dichentil euz ar Ponte-Kroaz, Aotrou Roue, a zo deuet d'en em glem, a d'am pedi da ober deoc'h anaout ar wirionez.

LAVARDIN *(sioulit)*

A dra zûr, Jean Villerouault?

AR ROUE

Euz ar Ponte-Kroaz?... Euz ho pro neuze, Aotrou De Rosmadec?

Mad, abalamour deoc'h e fell d'in e zigemeret ag e zelaou. Digasit anezhan ama!...

LAVARDIN

Aotrou Roue, an heur merket ganeoc'h a zo deuet. Mar selaouit an den iaouank-ze e reoc'h deomp dale.

AR ROUE

Ni en em glevo goude!  
*(D'an Aotrou De Rosmadec.)* Grit dezhan dont!

*(De Rosma tec a ia er meaz.)*



VI

AR ROUE ; LAVARDIN

LAVARDIN

Mar gelfen, Aotrou Roue, o lakaat var  
vez euz re vras madelez o kaloun !

AR ROUE

Bezit dienkreuz, Lavardin !

VII

AR ROUE ; DE ROSMADEC ; LAVARDIN ;  
JEAN

JEAN, *e c'harz treid ar Roue*

Aotrou Roue, evit va bro a va c'henvroiz,  
anavezit ar wirionez !...

AR ROUE, *en eur e sevel*

Bezit fizians, den iaouank, ar Roue a zo  
leal. Pe hâno o peuz, c'houi ?

JEAN

Jean Villerouault, Aotrou Roue.

AR ROUE, *d'an Aotrou de Rosmadec*

Jean Villerouault ?... A mab e vefe d'ar  
c'habiten-ze eur ar Ponte-Kroaz, lakeat d'ar  
maro en eun doare ken skrijus ?

DE ROSMADEC

Eo, Aotrou Roue !

AR ROUE

Joa e ve gan-en, den iaouank, rei deoc'h  
kement a c'houlennoc'h. Euz piou 'ta o peuz-  
c'houi d'en em glem ?

JEAN

Euz Fontanella, Aotrou Roue... Ne...

AR ROUE, *o lakaat Jean da rei peoc'h*  
Ia, entent a ran !... Kals droug o peuz  
out-han. — Klevet e m'euz eo bet displeal a  
kriz e kenver ho famil.

JEAN

Gwassoc'h zoken, eat eo a enep e c'her ag  
al le en devoa great.

AR ROUE

Gwir eo ivez kement-ze ; en anaout a ran,  
dleet e ve bet d'in e gastiza. Mez, petra ' fell  
deoc'h, den iaouank ?... eur Roue, evit ober  
ar vad a kaout ar peoc'h, n'hel ket ober ato  
ar pez a garfe, red eo dezan avechou dizonjal  
a rei ar pardoun euz kalz traou ; dreist oll,  
e kreiz kement all a zispac'h ag a drouz evel  
a zo brema.

LAVARDIN

Gwir a livirit, Aotrou Roue.

JEAN

Aotrou Roue, torrit anezhan euz e garg a  
diskarit e gastel.

AR ROUE

Va mignoun, da leal ma c'hell beza ho  
koulennoù, ne c'hellan ho selaou. Roet e



m'euz va ger ; eur Roue ne denn ket ar pez en devez roet. Var e bromessaou da veza fidel, e meuz da Fontanella roet ar pardoun.

LAVARDIN

Ar pez a rit, Aotrou Roue, a zo evit mad ag interest ar vro.

JEAN

Lakeat oc'h bet e gaou, Aotrou Roue, Fontanella a zo ar pez m'eo atao bet, eun den kriz, eun trubard.

LAVARDIN

Komzou an Aotrou Amaury a dall atao o re c'houi, den iaouank...

*D'ar Roue.* Kassoni etre famillou, a netra ken, Aotrou Roue, setu ar pez a velit dirazoc'h ; mez n'hellit ket en em emmel euz traou evelse.

AR ROUE

E gwirionez, va mignoun, ho rebechou a zo tenval awoalc'h ; red eo, araok pep tra, klask ar peoc'h er vro.

LAVARDIN

Oc'h interest oc'h-unan, den yaouank, a dle ivez ober deoc'h kol ar zonz euz ho tristidigez. An Aotrou Amaury ne glask nemet ho mad, er gouzout a rit ; fellout a ra dezhan ho renta evuruz. Ne d'it ket a enep dezhan, a dreist oll ne d'it ket da deuler er glac'har eur galoun karget a bromessaou ag a garantez.

JEAN, *d'ar Roue*

Aotrou Roue, me n'oun netra, mez abalamour d'ar Franç e-unan, en em ziskuezit leal, selaouit ar wirionez !

AR ROUE

Lavaret e m'euz deoc'h n'ellan mui netra... netra ! Deuit, De Rosmalec, deuit Lavardin !

*Mont a reont varzu ar meaz.*

JEAN

Aotrou Roue, Fontanella a zo e klask ho traisa.

LAVARDIN *a gostez*

Petra ' lavar !

AR ROUE, *o tizrei*

A enep d'in ? c'houi lavar e ma enep d'in ?

LAVARDIN

Aotrou Roue, a difizians o peffe euz komzou Amaury ?

JEAN

Ia, en oc'h enep. E ma zoken o klask soudardet evit mont a du gant Biron !

AR ROUE

A gwir a ve an dra-ze ?... gellout a raffec'h rei d in eun testeni bennag var ar poent-ze ?

JEAN

Goest oun, Aotrou Roue.



AR ROUE

An den digaloun !... me goulscoude bet ken madeleuz evithan !! Mad tre, trugarez deoc'h, den iaouank. Ne m'euz ket a amzer brema da lenn ho paperou, rak va dever am galv e leac'h all. Hogen, kasit anezho d'an offiser karget euz al labourou-ze ; me ho c'havo, a ma velan enno an disterra testeni euz trubarderez Fontanella, e varvo !

JEAN

Ar maro ! o nan, Aotrou Roue, arabad ar maro !

AR ROUE

Petra ' ta ?

JEAN

Diskar epken e gastel, e derri euz ar garg a c'houarnour. Dre e nerz e unan ne c'hell netra !

AR ROUE

Penaos ! A ne ket c'houi a ioa euz e damall, perag dont brema d'e zifen ?... Nan, truez ebed evit an trubarded, al lezen a zo sklear. M'ar kavan er paper-ze sklerijen euz e drubarderez, e varvo ! Kenavo, den iaouank !

*D'ar re all. Deuit !*

LAVARDIN

Red eo d'in raktal kass kelou da Amaury.  
*Ar Roue a De Rosmadec a ia er meaz.  
Lavardin a ia en tu all.*

JEAN, *eur c'hlin en douar, o sellet ouz ar Roue o tec'hat*

Aotrou Roue !!

VII

JEAN, *e unan*

Ne zelaou ket zoken ac'hanoun !... Paour keaz Jean, sell brema euz ar pez e p'euz great : laka da boan da glask niveri ar c'hollou e p'euz berniet an eil var egile. Na diskiant out bet o kredi e c'helfez diskuilla trubarderez Fontanella, hep lakaat e gondaoni d'ar maro ! Pebez follentez !... A pebez maro ?... maro an drubarded a lakai ar vez ag an dismegans da gweza var oll vemprou e famill ! Eur maro, ag a vo da virviken eur vez ag eur rann-galoun evit Amaury, ag ivez... evit Lena !

Ah ! Lena ! pardoun, ia, ro d'in ar pardoun !... Daoust a n'eo ket d'in-me c'hoaz ar gwassa, rag koll ac'hanout a zo evidoun eur rann-galoun.

A goulscoude, va dever oa !... *Gant tristediges*, an dever... — Ia, marteze... — Ah, paourez-keaz, Lena ! paour-keaz Jean, a c'houi, Amaury !...

Ah ! setu hen o tont ! hen e unan Petra ober ?

*Klask a ra tec'hat.*

IX

AMAURY ; JEAN

AMAURY *o kregi e dourn Jean*  
Ag ama eo e kavan ac'hanoc'h, Jean ?



JEAN

Lezit ac'hanoun, Aotrou Amaury, lezit ac'hanoun !

*Klask a ra mont kuit.*

AMAURY

Mez, petra 'ta a c'hoari ganeoc'h, Jean ?  
Perag e klaskit-c'houi tec'hat diouzin?...  
Komzit 'ta !

JEAN

Eun dever tenn e m'euz ranket seveni ;  
gwelet e m'euz ar Roue.

AMAURY

Ac'hanta, petra en devez lavaret ?

JEAN

Ho preur a varvo !

AMAURY

Ar maro !... Ah, Jean, a c'houi o p'euz  
great an dra-ze ? en despet d'am madelez, en  
despet d'am fromessaou ? Nag a vech, n'o  
p'euz-c'houi ket lavaret d'in e rofec'h peoc'h ?  
Penaoz ? petra 'ta en devez troet deoc'h ho  
spered ?

Ah ! Michel, hep mar ebed, dre gomzou  
flour, a dre zindan ?

JEAN, *gant nerz*

Michel a zo eur zervicher koz a leal, evit  
famill Villerouault, Aotrou Amaury. Gou-  
zanvet en deuz ivez kalz, aberz o preur kriz,  
Fontanella.

AMAURY

Ah ! Pardounit d'in, Jean ! — va glac'har  
am laka da gomz evelse. Ne c'hortozen tam  
ebed eur seurt tol da skei va c'haloun. Mez,  
lavarit d'in a gwir eo e c'houlennit e varo ?

JEAN

Great e m'euz, Aotrou Amaury, kement a  
c'hellen evit en miret. Brema n'hellan mui  
netra.

AMAURY

Netra ! netra !... — a kollet eo 'ta da vi-  
ken brud-vad ag henor va famill ?... A lakeat  
e p'euz o paperou etre daouarn ar Roue ?

JEAN

Nan, setu anezho ama. (*Ho diskuez a ra*).

AMAURY

Ah ! Jean, ne m'omp ket c'hoaz re zivezad.  
Hep ar paperou-ze, ar Roue ne c'hell netra  
enep va breur. Me o ped, Jean, en hano Doue,  
ne rit mui netra, lezit a gostez ho rebechou !

JEAN

N'ellan ket, Aotrou Amaury. Fontanella a  
zo en em zavet a nevez a enep ar vro ag a  
enep ar Roue, va dever eo en diskuilla.

AMAURY

Ah ! en toui a ran deoc'h, me raio d'am  
breur koumpren pegement diskiant eo ar pez  
a glask ober. Gouzout a rann, evit c'hoaz,  
n'euz netra c'hreat ; a veac'h zoken m'ho



deuz en em velet ag en em glevet. C'houi lavar eo evidoc'h eun dever diskuilla Fontanella. Mez, ag eun dever eo ivez evidoc'h, teuler varnoun an dizhenor, koll sked a saotri da viken va hâno kaër : De Beaumanoir, ken anavezet, abalamour d'am zud koz, dre Vreiz-Izel penn-da-benn?... A va mere'h Lena, Jean, petra 'ta e deuz-hi great evit beza, eveldoun, karget a fae ag a zismegans? Daoust ag eun abek bras oa evithi ho karet, a zoken kaout fizians e c'helfec'h eun devez...

JEAN

Ne damallit ket kement ac'hanoun, Aotrou Amaury, a sonjit er boan e m'euz va unan euz ho kwelet er glac'har.

AMAURY

A red e vezo d'in lavaret da Lena en deuz an hini a garie kement kollet brud-vad ag enor e hâno, a lakeat an dristidigez, an disesper zoken en e c'haloun?

JEAN

Ah! Aotrou Amaury, perag e teuit-c'hui d'am bourrevia evelse, pe gwir, evit va brassa drouk ag hoc'h hini, n'hellan mui nag argila na marc'hata? Ar Roue, brema, a anavez peb tra!

AMAURY

Petra 'ra an dra-ze, Jean, pe gwir n'en deuz testeni mad ebed? Ne skoio ket, hep abek na raisoun-vad. Oh! kuzit, devit ho paperou! Ar Roue a zo mad-meurbed. Me

velo anezhan, en em strinko d'e dreid; lavaret a rin dezan e c'hellin dizrei va breur, a sùr oun, va zelaou a raïo. Ah! Jean, roit d'inn ho ker, ne rannoc'h ket kaloun Amaury, ho mignoun koz!

*Eur pennadik peoc'h.*

Nag a anaoudegez vad n'am bezo ket evidoc'h, Jean? dleour e vezinn deoc'h ouspenn deuz va buez, dleour e vezinn euz evurusted ag enor Lena. Va zelaou ' rit?

*Peoc'h adarre. Jean a astenn e zourn.*

AMAURY

Ah! trugarez! trugarez!... N'ho tizonjin biken!



TREDE DIVIZ

I

MICHEL e unan

*Klevet a reer eun daboulin ag eun den o lenn :*

« Jean Villerouault en deuz an henor da gemenn da vourc'hisien ar Ponte-Kroaz, e tleont, a benn eun heur, en em voda var blasenn an Iliz, evit selaou ar c'helachou bras a zo da rei dezho. »

*Adarre an daboulin.*

MICHEL

Setu aze 'ta ar pezh or beuz gounezet gant beach Jean Villerouault e Paris. E bro Kerne, euz an eil penn d'egile, an dud a zonje e c'helfent beva sioul ag eüruz, o kredi, an taol-ma, oa diskaret an trubard. E peb leac'h ne glevet nemet meuli Jean Villerouault, ag an oll a oa prest d'en anaout evel madoberour a mestr. A goulscoude... ar virionez eo, bro Kerne a zo muioc'h-mui dindan galloud Fontanella ag e soudarded. Fizians or boa en deffe Jean on diouallet, a padal, en deuz kollet peb tra dre e zimpladurez. Ah ! piou eo an den fall-ze, en d'euz gellet lakaat Amaury var e hent, evit miret outhan da ober e zever ? Piou eo ar spier-ze, a zo en hon touez, a laka an oll da drei gathan a ne c'heller morse gwelet ?... Ah ! Jean, va mignoun !! penaoz e m'euz-me gellet kredi an disterra e zoa en da greiz eur galoun iac'h a nerzuz ? Herve goul-

coude en doa lavaret mad d'in : « Amaury a ra ar pezh a gar euz an den iaouank-ze. » Ah ! ar pezh a vclan hirio a zo re. N'ellan mui gouzav pelloc'h.

*Herve a zeu.*

II

MICHEL ; HERVE

MICHEL

Digwezet out, Herve ? Ag anaout a rez eur c'helou bennag ?

HERVE

Ia, gouzout a ran eo galvet oll bourc'hisien ar Ponte-Kroaz d'en em voda bremaic var blasenn an Iliz. Evit petra ? ne ouzoun ket. Da glask a rean evit kement-ze.

MICHEL

Me a oar, me. Peadra o devezo keariz Ponte-Kroaz da veza souezet ! A gwelet a rez aze skabellou a skigner ? A gouzout a rez evit piou kement-all a draou ?

HERVE

Nan, ne ouzoun netra.

MICHEL

Evit ar gouarnour nevez (*gant fac* evit Fontanella e unan.

HERVE

Penaoz ! hardizegez avoalc'h en devezo an trubard da zont ama, var ar blasenn-ma, e deuz gwelet e grisder ? A dizonjal a raffe euz



Jean Villerouault, ag euz bugale ar re a zo bet lazet ganthan?

MICHEL

Ah! Herve, m'ar deo an oll vugale-ze ken fidel da Fontanella evel ma z'eo Jean Villerouault, ne velan ket petra e'helpo ober aon dezhan. Agouspen, pegen bras n'eo ket brema e c'halloud; ar Roue a zo a du ganthan. Piou 'ta dre ama a gredfe sevel e zourn var kannad Roue Franç? Ia dont a raio! Fellout a ra dezhan e ve ar Ponte-Kroaz ar genta euz an oll geariou oc'h anaout e garg a c'houarnour.

Rag-ze, bremaïe, divar ar skigner-ze, eur c'hannad a embanno eo roet da Fontanella gouarnamant ar vro-ma, pe evit lavaret guelloc'h: urz a gwir da laerez, da grabanata a da laza evel a-ziaraok; mez hep aon nag enkreuz ebed en taol-ma, abalamour m'eo roet dezhan ar garg a c'houarnour.

HERVE

Nan, ni ne velimp ket an dra-ze, Michel, rag kentoc'h... me...

MICHEL

Bez' sioul, Herve, rag gwassoc'h evit an dra-ze a welimp. Ni a velo e kichen Fontanella, (*gant fae*), or gouarnour nevez, (*gous-tadik*), Jean Villerouault, mab va mestr koz.

HERVE, *souezet*

Jean Villerouault?

MICHEL

Ia, Jean Villerouault! Bremaik e klevoc'h embann eo anvet Letanen Fontanella ag e gannad evit ar Ponte-Kroaz ag ar parrezioù tro-war-dro. Nan epken an dijentil a zizonj ag a ro ar pardoun, en em lakaat a ra zoken e servich muntre e dad. Pebez fazi diskiant!! Ah! Herve, gwelit petra ra an ourgouil ag eur garantez direiz euz an den, pa o lez da ober o mistri warnezhan e leac'h o suji ag o flega e poent!

HERVE

Kement-ze ne e'hell ket beza gwir, Michel!

MICHEL

Penaos? A ne ouezez-te ket, e zeus bet e Paris eun emgleo, pe kentoc'h eur marc'had, etre Jean ag Amaury? Evit ar garg a Letanen a kaout Lena « Merc'h Amaury » da bried, Jean en deuz roet e c'her ne raio mui rebech ebed da Fontanella.

HERVE

Paour-keaz den!!

MICHEL

Paour-keaz den? lavar 'ta den digaloun! A ne ouezez ket ivez en deuz, var goulen Amaury, aotreet kloza en eur gampr an diskiantez e vamm? Paourez-keaz maouez! evit doare, e faltaziou a zo eun danjer evit ar gouarnour nevez! Ah! entent a ran o deffe aon out-hi, ag o deffe enkreuz! E gwirionez, daoust a n'eo ket eun testeni paduz euz iuda-



zerez an trubard ? Biken, keit a ma vevo an diskiantez-ze, ar Ponte-Kroaz na gollo ar zonzj euz Fontanella. Nan, biken, keit a ma vezo gwelet a klevet e unan, dre ar ruiou, o kana e zristidigez, o c'hervel e fried, e mab pe unan bennag evit e venja. Ar vaouez-ze 'ta a ioa var ho hent, evit diskar ho ourgouill ag ho fizians direiz. A ma vesse deuet dezhi dont ama, epad ma vesse e mab oc'h en em bom-padi euz skoazel ar bourreo !... Red oa 'ta, teuler a gostez, ober ruz a kuzat an test-ze, a c'helle digas sonj euz al lazerez. Ag e mab, ia, Jean, en despet d'an daelou a skuill c'hoaz varnezhan, en d'euz aotrect, en d'euz zoken sikouret ober al labour mezus-ze. An Ilroun Villerouault e d'euz zoken kollet e liberte, rag klozet eo abaoue ar mintin-ma.

HERVE

N'ouzoun petra sonjal ! Mez, da viana, Michel, te ne d'i ket d'an embann-ze, na keariz ar Ponte-Kroaz ken neubeud ?

MICHEL

Siouaz ! aon e m'euz n'a daffe ar Ponte-Kroaz a-bez da zelaou. Lod, an dud fall a losk, ato prest da bokat a da lipat an dourn a c'hell o c'hastiza, tud netra ! Lod all, gant ar c'hoant da anaout pep tra, a ne ouzont ket zoken evit petra int pedet da zont.

HERVE

N'hellomp lezel kement all a draou mezus da erruout ama er memez devez. — Red eo lakaat diarbenn.

MICHEL

Edoun va unan bremaik er zonzj-ze. En em zevel a enep ar gouarnour ? Nan... n'or beuz ket a amzer da glask hon tud, a marteze an tu gounid ne ve ket deomp... Mez, eur zonzj all e m'euz, gwelloc'h eged an dra-ze. Red eo, hep dale tam, boda hor mignounet.

*Sellet a ra en dro dezhan.*

Oh ! Piou 'zo erru ? Fontanella... Deomp ac'hann, en hent ni en em glevo !

III

FONTANELLA ; AMAURY

FONTANELLA

Ia, anaout a ran ar blasenn-ma ; pep tra 'zo evel a ziaraok. Setu aze an Iliz. Enni eo ec'h en em denjont evit en em zifenn.

Diskuez a rajont kals nerz-kaloun ; hanterkant, d'an nebeuta, euz va zoudardet a voe diskaret var al leac'h, lazet gantho. (*O c'houeza e vouez.*) Ah ! na great e m'euz dezho koumpren petra dalveze buez unan euz va zoudardet ! La Boulle dreist-oll en em ziskuezas kriz-spoutuz. Ne skuize ket o laza.

AMAURY

En hano Doue, va breur, lez' a gostez ar zonzjou tenval-ze. A draou all e zeuz menek brema. Red eo klask ar peoc'h, a digoll tud ar vro euz ar gwall-amzeriou-ze.

FONTANELLA

Assa, Amaury, va laza ' ri gant da gomzou



fur. Foeta bro, klask enebourien, laza hep truez ebed, setu aze va buez-me !

AMAURY

Mez, a ne ouezez-te ket out eveseat gant ar Roue ? Jean ivez, gant eur ger, a c'hell da goll da virviken. Red eo d'id rei d'ar Roue eun testeni euz da lealded, a diskuez da Jean e peuz keuz, e fell d'id brema e garet.

FONTANELLA

A me ra forz-me, euz rebechou Jean Ville-rouault ? A kaout a ra d'id 'ta eo gwest d'ober d'inn eun droug bennag ? Sell, va brassa ioul, eo brezellekaat a enep ar Roue e unan. Daoust ag e armeou n'o deuz ket, diou wech dija, ranket kila dirag va c'hastel ? Sourdeac a anavez mad an dra-ze ; ra zeui adarre, a gantan Roue Franç e unan !

*(Gant fae) Goulscoude, pe gwir e fell d'id...*

AMAURY

Ia, sent ouz-inn, gwell-mad, pep tra a zo prest. Boure'hisien ar Ponte-Kroaz a ziredo bremaik ama, evit selaou embann ar c'helachou-nevez. An dud vad-ze ne glaskont nemet ar peoc'h, a bez sur, lorc'h-bras a vezo enno gwelet ar pez a rez evitho. Ne erruo droug ebed. Jean en deuz lavaret d'inn e vesse sioul pep tra. Ne zeuz nemet Michel, ar penn skanv... Mez Jean a zo e difizians anezhan...

Ah ! setu Quilliec o tont, bremaic ni glevo ganthan.

IV

FONTANELLA ; AMAURY ;  
QUILLIEC, *gwisket e bourc'his*

*(En eur erruout, Quilliec a zeu da bokat da zorn Fontanella a da Amaury, en eur lavaret o sellet en-dro dezhan : N'oun gwelet gant den ?)*

QUILLIEC

Ne vezo netra. Bressa avoalc'h a ra Michel, mez an dud ne glaskont nemet ar peoc'h. Den na ielo a du ganthan m'ar fell dezhan en em zével.

FONTANELLA

Bezit war evez anezhan, Quilliec. Lavaret e m'euz d'am zoudardet m'er c'havont beza didruez out-han. Lakit anezho var e roudou. A goude tout, gwoaz a ze dezho ma c'hoarvez eun dra bennag fall, rag me ziskuezo dezho evit an eil guech, petra eo lakaat droug e Fontanella.

QUILLIEC

Aotrouien, mont a ran diouzoc'h. Arabad e vesse difizians var-noun. Red eo rei eun taol lagad var ar blassen, rag on tud euz an enezen ne zalcint ket da erruout.

AMAURY

Ia, kerzit, Quilliec, a ma kav deoc'h dizoloi eun dra bennag, lavarit deomp raktal.

*(Mont a ra er meaz.)*



V

FONTANELLA ; AMAURY

AMAURY

Rag-se, bez sioul pa gomzi outho. Taol evez d'ho egasi.

Dreist oll espern Jean, bez damant dezhan, rag poan bras e m'euz bet ouz e c'hounid, a zoken, paneved ar fizians da gaout evit pried va merc'h Lena, morse na vefen deuet a-benn anezhan.

Hogen, arabad dale ama, Jean ' zo euz hor gortoz. N'or beuz nemet an amzer da vont d'e ziambrouk... Setu eur vandennadik tud o tont. Laouen-bras int, ervez a velan.

VI

HERVE, *a pevar euz he vignouned*

HERVE

Michel n'eo ket deuet c'hoaz ! Ne dlie ket dale goulskoude. Eat eo da glask an tu da vont da vaner Villerouault. Mez, souezet oun, ne vesse ket c'hoaz dizro... Ah !... o tont ema.

VII

MICHEL ; HERVE *ag ho mignounet*

MICHEL

Ac'han-ta, mignounet ! E tail emaoe'h ?

OLL

Ia, ia, setu ama hor c'hlezeier (*diskuez a veont armou kuzet dindan ho dillad*).

MICHEL

Trugarez deoc'h, mignounet ! A brema, savit ho penn, bezit nerz-kaloun. Diskuezomp e zeus c'hoaz Breiziz e Breiz-Izel, a ne fell ket deomp kol brud-vad ag henor on tud-koz, en eur suja ag plega hor penn da dud kriz, da drubardet.

Greomp eur ganaouen :

I

Var zav, mignounet, selaouit galv o pro,  
Hirvouduz a trist evel ar maro.  
Tennit o kleze, Breizis a galon :  
Skiltruz a mibin, ar galv a ziston.  
Ra vezo klevel, a dost ag a bell :  
Bevet Breiz Izel, bevet Breiz-Izel !

II

Er goad, en anken, Breiz va mam garet,  
Hep nerz, hep galloud, c'houni ' zo diskaret.  
Mignounet, var zav, var zav iaouankiz,  
Evit o pro, o feiz, o frankiz !  
Lavaromp oll, kanomp a vouez-huel :  
Bevet Breiz-Izel, bevet Breiz-Izel !

III

D'ar stourmad, iaouankiz ; an deiz ' zo diguezel !  
Lam d'an dud difeiz, lam d'an drubardet !  
Klaskomp gant aked, tomma pep ene  
Oll evit ar vro, oll evit Doue.  
Hed or buez, kanomp, kanomp beleg mervel :  
Bevet Breiz-Izel, bevet Breiz-Izel !

MICHEL

A brema, kuzomp an armou-ma. Bezomp hardis. Gan-en ema an alc'houez evit mont e kambr an diskiantez. Euz ar c'hostez-ze, pep tra 'zo mad. Nemet red e vesse, arabad skei, evit ma kouezo varnho penn-da-benn an dis-



megans a zo euz o gortoz. Ne zizonjit ket ema galloud ar Roue evit difen an trubard. A neuze, taolit evez, rag en hon touez e zeuz unan bennag o klask hor gwerza. Evit gwir, n'eo ket falvezet gant-han digas kalz tud d'he heul; mez bezit sur euz eun dra, an trubard en deuz, en hon touez, eun niver bras a zoudardet, digaset euz enezen Tristan a guisket e bourc'hisien. Ne ket armou a vank dezho d'e zifen. Rag-ze 'ta, var evez a nerz-kaloun !

(*A bell e klever kanaouennou.*)

MICHEL

Selaouit ar moueziou-ze ?? a dra zur kannaded Fontanella. Deomp en eun tu bennag all da c'hortoz, du-ze, Herve ! arabad e veffen-me anavezet. Re abred eo c'hoaz : an dra-ze a ve va maro. Deomp da baka bep a vanne d'ar *Voul-Aour*.

VIII

*Pevar zoudard, eun tammik tommet, guisket e bourc'hisien, a zeu en eur gana*

OLL

*Diskan*

Kanomp, c'hoarzomp, greomp gouel-mad,  
D'ar gouarner, eur chopinad.  
Buez hir, peoc'h bras d'hoc'h gouarner :  
Joa bras eo d'omp o tigemmer.

II

AR C'HENTA

Hor c'halonou a drid gant joa  
Pa gomzer d'omp a beoc'h brema ;

Eun ehan a glask pep hini,  
Er iaouankiz ag er gosni.

*Diskan*

III

AN EIL

Stank e koezemp er stourmajou.  
Dindan grisil ar boledou ;  
Gwelloc'h kavomp eur lipaden  
Eged skuil goad var an dachen.

*Diskan*

UNAN

Assa, e gwirionez mignounet, ne zonzjen ket gwelet an traou o vont evel-en. Ar mestr a ioa sur da veza devet ez veo, e kreiz kear Baris. E drubarderez a ioa anavezet mad.

EUN ALL

A dra sur, Michel eo en deuz diskuillet anezhan, rag n'oa nemet-han oc'h anaout e droiou.

AR C'HENTA

Me zonzje d'in oa great gant-han. Ar c'has-tel diskaret, Fontanella lakeat d'ar maro, ag ni. . krouget. A setu troet penn d'an abadenn !! Pebez den mad eo an Aotrou Amaury ! Ah ! setu epo unan, a ne lez ket an traou en hanter vordou,

AN TREDE

N'euz fors ! me garfe kaout Michel hirio war va hent. Na laouen e veffen o sanko ar c'hleze-ma en he gof. (*Diskuez a ra e gleze.*) Mez, gwelet a reoc'h, n'en em zispako ket, re a aon en devezo..... Ah ! oma erru Quilliec



IX

QUILLIEC ; SOUDARDET

AN TREDE SOUDARD

A gellout a raffes-te lavaret deomp petra eo deuet Michel da veza ?

QUILLIEC

Ema raktal o paouez mont aze, en davarn ar Voul-Aour.

AR PEVARE

Allo, mignounet, deomp ivez, rag va gour-lanchen a zo seac'h.

AN TREDE

Ia, ia, deomp.

QUILLIEC

Taolit evez, rag niveruz int ag armou e m'euz gwelet gantho !

AN TREDE

Bremaik ni 'velo ! Hich, peoc'h, ama z'eus erru tud. Nag a hast o deuz da zont !

*Mont areont kuit en eur gana ; erruout a reont gant pevar bourc'his.*

X

PEVAR BOURC'HIS

UNAN

Anaout a rit an dud-ze ? Evit eur gwel, ne dalvezont ket kals tra. — A mignounet int, pe enebourien ?... Difianze m'euz ne dremenfe

ket ar pardaez hep eun tam dispac'h bennag... (*klevet a reer trouz... iouc'hadennou.*) Sel-laouit !! klevit an trouz-ze, a deu euz ti Herve. — Piou 'ta o d'euz kanet ? (*Iouc'hadennou a nevez : lazomp anezho, lazomp !*)

AN EIL

Assa, petra ' zo aze ?... deomp da velet !

AR CHENTA o klask derc'hel an eil

Lezit anezho ! o klask en em laza emaint, — goude tout an dra-ze a zell outho. — Evidomp-ni, n'or beuz nemet gwelet a gwirion eo ar peoc'h a ginniger d'eomp.

EUN ALL

Mez n'oun ket evit koumpren n'en deffe ket Jean Villerouault goulenet lezel ar brizounerien e liberte. Marteze ivez, Fontanella n'en d'euz ket ho roet.

XI

BOURC'HISIEN, 4 PE 5,

*eun ear drouk enno*

UNAN

Nan, ne c'hellomp ket gouzanv an dra-ze. M'ar fell da Fontanella lakaat ar vro-ma da anaout e c'halloud, ne ket evelse e tlie en em gemeret. Ne dleffe ket beza karget ar vro a spieren. — Ne m'omp ket e peoc'h er gear ! A gouzout a rit ar pez a zodiguzet e ti Herve ??



OLL

Petra 'ta zo e'hoarvezet ?

UNAN

Pevar spier, a berz Fontanella, a zo eat bremaik d'an davarn. Unan anezho en deuz anavezet Michel...

OLL

A neuze ?

UNAN

Beac'h a zo savet, kals taoliou ' zo ket roet. An trubardet, karget oant a armou ; hor mignounet ivez, dre eur-vad. Goad ' zo bet, Michel a zo glazet. Evelato, or deuet a-benn euz ar müntrierien-ze. Duhont emaint brema, stag mad, a liammou war ho daouarn. Setu eno pevar neubeutoc'h, a ne raint ket kals dispag en abardaez-ma. Mez, taolomp evez, rag sùr awale'h e kavimp c'hoaz !

UNAN

A gwall-bistiget eo Michel !!

AR C'HENTA

N'ellan lavaret deoc'h. E zremm a ioa leun e'head... Setu hor mignounet o tont, bremaik e klevimp.

XII

HERVE a zeu gant eun nebeud mignounet

OLL e c'houlennont gant hast

Ac'hanta ! A Michel ?...

HERVE

Fizians e m'euz n'en deuz ket kals tra. Ne zaleo ket da zont ama. Arabad eo deomp koll hon amzer.

*D'he vignounet en eur ziskuez an tu kleiz euz ar blassen.* Ni en em lakeo ama. Dre ama e thie dont. Mez, selaouit mad : red eo rei peoc'h a beza dispount. Dreist-oll, arabad e c'hellfe den diskredi e zeus armou ganeomp !

XIII

*Eun nebeut soudardet a deu, gwisket e bourc'his, — en em lakaat a reont dirag ar skigner.* QUILLIEC a zo euz ho bleina.

QUILLIEC gant eun ear enkrezet

Ne velan ket hor mignounet ? E peleac'h 'la int choumet ? Poent eo d'ezho erruout, rag setu ar gouarnour o tont.

XIV

*Dre an tu kleiz, en traon, e teu :* EUR C'HANNAD, FONTANELLA, AMAURY, JEAN.

AR C'HANNAD, gant nerz

Diwalit, setu ar gouarnour !

AR ZOUARDDET

« Bevet ar gouarnour ! »

*(Fontanella a zav var ar skaon ; a gleiz ema Jean ; a zeou, Amaury.)*



FONTANELLA

Ia, mignounet, dre anaoudegez-vad evit va oberou, ar Roue en d'euz va hanvet gouarnour Douarnenez.

AR ZOUARDDET

« Bevet ar gouarnour ! »

FONTANELLA

Ne glaskan brema nemet ar peoc'h evit ar vro-ma. Falvezet eo gan-en e velle ar Ponte-Kroaz ar gear genta o tigemeret ac'hanoun ag oc'h anaout va galloud. Ne guzan ket ouzoc'h, skuis oun oc'h ober brezel ag o skuill goad euz an eil kostez d'egile. Gellet am beffe kender'hel da vrezellekaat ; va c'hastel ne c'hell beza diskaret, va zoudardet n'hellont beza trec'het. Mez, ar Roue a zo ken mad, ma ne fell mui d'in enebi outhan. Gouarn a rin 'ta ar vro gant dousder a gant lealdet.— E leac'h an enkreuz, ne fell d'in mui brema nemet hada a skigna ar garantez.

AR ZOUARDDET AG AR VOURC'HISIEN

« Bevet ar gouarnour ! »

FONTANELLA

Mez, evel ma z'eo bras ar vro, e m'euz sonjet kaout eul letanen anavezet a karet ganeoc'h. A dra zur, tud ar Ponte-Kroaz a vezo joa gantho klevet e m'euz dibabet, evit va sikour, unan euz ho c'henvroiz. Jean Ville-rouault eo a c'houarno ac'hanoc'h em hano.

SOUBBRDET A BOURC'HISIEN

« Bevet Jean Villerouault ! »

FONTANELLA

Brema, eur c'hannad a lenno deoc'h bolontez ar Roue.

HERVE, *en eur zirei eun tammik*

Assa ! netra c'hoaz ! petra 'ta zo c'hoarvezet ? ..

AR C'HANNAD (*sevel a ra var ar shaon, e-kichen Amaury*)

(*Lenn a ra :*)

Er blavez c'houezek-kant tri, d'an devez kenta a viz genver...

(*A bell en tu kleiz e klever mouez an diskiantez :*)

AN DISKIANTEZ

Fontanella a barrez Prat...

(*An dud a zo souezet*)

(*Ar c'hannad, nec'hed, a lavar a nevez :*)

Er bloavez c'houezek-kant tri....

AN DISKIANTEZ, o tostaat

Falla den a viskaz dillad

(*Fontanella a gemer aon*)

AR C'HANNAD

Ni Herri, pevare euz an hano.....

AN DISKIANTEZ

Hep trugarez en deuz lazet

(*Jean a azez, e benn etre e zaouarn*)

AR C'HANNAD

Dre c'hraç Doue, Roue França Navarr,



AN DISKIANTEZ, e kichenik  
Va goaz a va mab ken karet.

FONTANELLA, *droug ennhan*  
Pellaït ar vaouez-ze !

(*Ar zoudardet a glask dont varzu ennhi ;  
mignounet Michel a vir outho.*)

AN DISKIANTEZ (*a zeu a vell d'an oll, Mi-  
chel a zo en he c'hichen ; var e dal eun  
tam tien karget a c'hoad*).

(*An diskiantez a gan :*)

Fontanella a.....

(*En eur ziskuez, gant e biz, Fontanella :*)

Ah ! hennez eo ! hen anaout a ran ! Müntrer,  
trubard, müntrer !!

FONTANELLA

Tud digaloun, kassit 'ta anezhi kuit !!

(*Ar zoudardet a mignounet Michel a zispag ho  
c'hlezeier ; ar zoudardet a ziskuez kaout aon.*)

MICHEL

Goaz a-ze d'an nep a zavo e zourn var ar  
vaouez-ma !

AN DISKIANTEZ

Petra ! daoust a ne vezo den ebed ama evit  
va venja ?

JEAN, *o sevel a daol*

Eo, me !...

(*Mont a ra euz ar skaon varzu e vamm. —  
Quilliec a sko varnezhan, en eur dremen,  
hag en eur lavaret :*)

Trubard !

(*Jean a gvez e-hars treid e vamm*).

MICHEL, *o sevel e gleze, a sko Quilliec e kreiz  
poul e galoun. en eur lavaret :*

Den digaloun !

FONTANELLA, *o sevel e gleze*

Soudardet, sikour, sikour d'in !

*Ar zoudardet a zeu var ho c'hiz, gant aon ouz  
mignounet Michel.*

FONTANELLA

Tud aonik, ne dec'hit 'ta kuit !

*Ar zoudardet a ia er meaz.*

AMAURY, *o kregi e Fontanella*

Ah nan ! va breur, arabad skuill goad ! —  
Tec'homp, tec'homp ac'han !

(*Mont a ra er meaz gant ar zoudardet.*)

AN DISKIANTEZ, *oc'h asten e breac'h*

Ia ! kerz kuit, bourreo. — Malloz, malloz  
var-n-oud !

*Michel a zav Jean ag e zalc'h. — Er meaz e  
klever iouc'hadennou :*

Fontanella, trubard, trubard !

XV

JEAN ; AN DISKIANTEZ ; MICHEL

MICHEL, *o terc'hel Jean*

Va mestr, c'houi a zo pistiget !!

JEAN

Ah ! Michel ! e m'aoun o paša va faotou, va



dizentidigez. Mez, anaout a rann brema va dever; bezit sûr, hen heulia 'rin gant nerz ag hep dale.

AN DISKIANTEZ

Paour-keaz den iaouank?...  
(*O komz da Jean*) Perag 'ta o d'euz-hi da bistiget?

JEAN

Evidoc'h, va mamm? abalamour e m'euz klasket ho tifenn!

AN DISKIANTEZ

Piou out-te 'ta, den iaouank! pe gwir e klaskez va difenn?

JEAN

Me eo... o mab!!

AN DISKIANTEZ, *o lakaat e dourn var e zall*

Va mab!...

Ia! me am beuz bet eur mab!... (*o lakaat e dourn var dall Jean.*) Ia! gwir eo, hevel oa ouz-id, da vleo, da vouez en devoa... Mez, va mab a zo maro. Ar bourreo-ze, Fontanella, en deuz e lazet. Ah! paneve-ze, Jean en deffe venjet ac'hanoun!

JEAN

Me eo Jean, me eo o mab, me o venjo!

AN DISKIANTEZ, *en eur hija e fenn*

Nan!... maro eo, ne meuz mui mabebed!...  
(*o sellet pisoc'h*) a goulscoude, da zaoulagad, da c'henou!...

JEAN

Ia!... sellit ouz-in... me eo o mab, me eo Jean!

AN DISKIANTEZ

Ah! komz, komz c'hoaz! da vouez a zo hevel ouz e hini?... kaout a ra d'in e glevet, e velet. — Ah! ma veffe gwir e vez va mab!...

JEAN

Va mamm, kredit, me eo o mab!

AN DISKIANTEZ

Ah! te eo? Ia, sonj e m'euz, gwelet a rann... Va Doue, na c'houi zo mad... Ah! va mab, va mab!

MICHEL

Bennoz deoc'h, o va Doue!



PEVARE DIVIZ

**Kenta Arvest**

DE ROMAR ; LAVARDIN

DE ROMAR

Evelse 'ta, an damallerien eo o d'euz ar gounid var Fontanella. Paket eo gant tud netra, kuzet var e hent, a kasset evel prisounier da Baris ! Eur spount eo kement-ze. Ne m'euz ket zoken gellet e velet evit rei dezan eun testeni euz va anaoudegez-vad ag euz va c'harantez. Brema e ma o vont da veza barnet, kondaonet, hep na c'hellimp kaout an se disterra amzer evit e zifen.

LAVARDIN

Ag Amaury ?

DE ROMAR

Deuet oun en e raok evit o kwelet, d'o pedi da vont eur wech all da gaout ar Roue.... Rag-se 'ta ar Roue ne zelaou netra ?

LAVARDIN

Nan, ar Roue ne fell dezan tam ebed klevet hano euz dousder ag euz madelez. Ne ra van a beden ebed. E greden eo, e klaske e guirionez Fontanella en em zével gant Biron.

DE ROMAR

A goulskoude, pe seurt sklerijen en d'euz var ar poent-ze ? Ne gavont nemet an droug-komzou skuillet du-ma du-hont gant Michel.

Mez, daoust a testeni eun den evelse a zo avoalc'h evit guir varnerien ?

LAVARDIN

Displeget e m'euz an traou-ze oll dirag ar Roue ; gwasas 'zo, ervez a glevan, testou all a zo deuet da zével oll rebechou Michel.

DE ROMAR

Piou 'ta ?

LAVARDIN

Soudardet enezen Tristan marteze, gounezet gant Michel.

DE ROMAR

N'eo ket guir an dra-ze ; etouez ar zoudardet-ze ne ve ket kavet eun trubard..... Assa, koulskoude, e pe leac'h 'ta e choum Amaury ?....

LAVARDIN

Petra raio ? Fontanella 'zo brema barnet a kondaonet evit ober plijadur da Vichel a da Jean Villerouault.

DE ROMAR

Mad, o levenez a vezo berr, rag en lavaret a ran, nikun euz an daou-ze na zizroïo beo da Vreiz-Izel.

LAVARDIN

Penaoz 'ta ! a c'hoant o peuz d'en em ganna e duel ? Daoust a ne anavezit ket al lezennou var ar poent-ma ? Treac'h pe dreac'h et, en em lakiit atao var-var da goñl o puez.



DE ROMAR

Petra 'ra ar vuez d'in-me ? Ma rank va mestr koz mervel, en toui a ran, e vezo venjet mad... Mez setu ar varnerien o tont.

LAVARDIN

Kenavo, De Romar, rag ne fell ket d'in chom da velet goapaat al lealded.

**Eil Arvest. — Ar varnedigez**

*E kreiz, tri barner — a gleiz, var eur skaon,  
Jean a Michel — a zeou, eur zoudard —  
a dre kein, ar varnerien, eun hucher.*

AR PRESIDENT

Digassit ar prizounier dirazomp.

*(Eur zoudard a zigas Fontanella,  
e zaouarn chadennet.)*

AR PRESIDENT, *da Fontanella*

Oc'h hanô ?

FONTANELLA

Fontanella De Beaumanoir, hanvet laer bras bro Kerne, gouarnour Douarnenez.

AR PRESIDENT

Tamall a reer d'oc'h kals traou, a zoken traou euz ar re woassa.

FONTANELLA, *krenv*

Er gouzout a ran... Mez, d'en em glem e m'euz, evit an doare m'oun bet kemeret. Ne ket evelse e vez paket eun den, a stlejet dirag

barnerien. Eun devez, edoun va unan gant eur servicher, o pourmen, e kichennik va e'hastel Kergelen ; en eur e'horn distro, ugent soudard, ugent trubard, a grogas ennoun ; — va daouarn a voe karget a jadennou, evel a reer d'an diveza torfetour. Ah ! perag n'or ket deuet da daga ac'hanoun e kastel enezen Tristan ? Dleet oa, renka armeou ar Roue dirag ar e'hastel-ze. Na joa e ve bet gan-en en em ganna ouz ar guella letanen euz e balez. O flastret em beffe oll. Zoken, ma vesse digouezet gan-en beza trec'het, e vesse bet laouen o koueza dindan taoliou eun den evel De Rosmadec. Hogen, e leac'h an dra-ze, e z'eus digasset ugent trubard d'am faka. Marteze zoken, na va fried na va breur ne ouzont petra oun deuet da veza. Paour keaz breur ! kement-ze n'eo nemet trubarderez, a n'oun evit gouzany trubarded.

AR PRESIDENT

Respontit da e'houlennou ar varnerien.... A guir eo o peuz devet bourc'h Penmarc'h, lazet labourerien Plogastel, laeret kear ar Ponte-Kroaz ?

FONTANELLA

En amzer ar brezel oa — red oa beza didruez euz al labourerien-ze, ne felle ket dezho beza a-du ganeomp.

AR PRESIDENT

Er Ponte-Kroaz, en despet d'ho promesaou, o peuz lakeat krouga ar e'habiten Ville-rouault ag e zoudardet.



FONTANELLA

Daoust ag espernet o doa va zoudardet-me ?

AR PRESIDENT

Eno c'hoaz o peuz lakeat o soudarded da ober a bep seurt dismegans var maouez ar c'habiten Villerouault.

FONTANELLA

A kavet e deffe guelloc'h beza krouget evel e goaz ?

AR PRESIDENT

En enezen Tristan, o peuz great da brizounerien ar Ponte-Kroaz gouzanv a bep seurt poaniou, bet oc'h evitho didruez a digaloun.

FONTANELLA

Paket oant ga-en ; bez am boa varnho guir a vuez ag a varo. Gellet em beffe o flastra. A goude tout, perag dont da rebech d'in hirio kement-ze a draou, pe gwir ar Roue en euz roet d'in ar pardoun ? Daoust ag e c'her ne dal ket hirroc'h eged va hini ?

AR PRESIDENT

Gwassoc'h a damaller deoc'h ! Lod a lavar e moc'h a-du gant Biron. Galvet o peuz mortoloded ar Spagn da zont e Breiz-Izel. Ema en o sonj rei dezho enezen Tristan !

FONTANELLA

N'eo ket guir !

AR PRESIDENT

Ne glaskit ket nac'h, rag sklerijen or beuz var bep poent !

FONTANELLA

Pe seurt sklerijen ?... a bep seurt komzou, hadet gant ar Michel-ze... Ah ! ma veffe bet va zoudardet ama, setu eno testou ag o deffe dispaket ar virionez. Ne peuz ket zoken roet d'in amzer d'ho c'hlask a d'ho gelver ama?...

AR PRESIDENT

Taolit evez, en em fazia ' rit.  
(*D'an hucher.*) Digassit an testou ama.

III

AR PRESIDENT ; C'HOUEC'H TEST, *en tu kleiz*

AR PRESIDENT

Ag anaout a rit an dud-ze ?

FONTANELLA

Ia, lod anezho o deuz va zervichet en enezen Tristan.

AR PRESIDENT, *d'an testou*

A kendelec'her a rit d'ho ker ? — A gwir eo en deuz Fontanella goulennet diganeoc'h en em zavel gant Biron ?

AN TESTOU

Ia !

FONTANELLA

Tud disprijus a digaloun ! Goude beza o karget a vadou, en em zavit em enep pa n'ellan mui o paea.

(*D'ar president.*) Digant tud evelse o



c'hellit goulen pep tra enep d'in. Mad int da brena a da werza. Pell amzer 'zo ec'h anavezant o zalvoudegez. Laeroun a muntreerien, ato prest d'am dilezel, nemet klask a raffien evitho an tu da laerez a da laza, da zibri a da eva. Ar re-ze eo a dlie beza dirag ar varnerien.

AR PRESIDENT, *d'an hucher*

Digassit ama pevar zoudard.

EUN TEST, *a gostez*

Ema great ganeomp!

AR PRESIDENT, *da Fontanella*

Ag eun dra bennag o peuz c'hoaz da lavaret evit en em zifen?

FONTANELLA

Seurt ebed. Grit diouzin ar pez a garoc'h!

*(Ar barner a skriv eur pennadik — pevar zoudard a en em laka adre).*

AR PRESIDENT, *a zav, o lenn*

« Ar varnerien, goude beza klevet klemmou famill Villerouault, anavezet an torfejou rebechet da Fontanella De Beaumanoir, ha selaouet oll rebechou an testou.... a c'hourc'hemen :

IV

AMAURY, *o tont dirag ar barner*

Truez, aotrou, truez!

AR PRESIDENT

Piou oc'h-hu?

AMAURY

Breur Fontanella!

FONTANELLA

Paour keaz breur!

AR PRESIDENT

Petra o peuz-hu da lavaret?

AMAURY

Va breur n'ema ket a du gant Biron, en toui a ran!

FONTANELLA, *d'e vreur*

Kol a ri da boan, setu aze an damallerien *(diskuez a ra ar zoudardel)*.

AMAURY

O va breur paour!

AR PRESIDENT

« Ar varnerien a c'hourc'hemen : e vezo diskaret kastel enezen Tristan, e vezo lezet ar brizounerien e liberte, a dalc'het, en o leac'h, an testou, evit beza roet sikour da Fontanella. »

Goardou, krogit enno!

AR PRESIDENT, *da zaou zoudard all*

A c'houi, dalc'hit mad da Fontanella; ra vezo lakeat raktal d'ar maro, a dirag an oll!

AMAURY, *daoulinet*

Ah! aotrouien, truez, truez!

JEAN, *e kichen Amaury, daoulinet ivez*

Aotrouien, bezit mad, lezit ganthan ar vuez!



FONTANELLA, *da Jean*

Den iaouank, n'o peuz ket ezoum da dreezi ouz-in-me ! En anzav a ran, gaou e m'euz great ouz da famill — gounezet e m'euz beza kastizet. — Mez, biskoaz ne m'euz bet aon ouz den — ne m'euz ket aon ouz ar maro — liz ac'hanoun da vervel !

AMAURY, *e divreac'h e vreur*

Va breur !!

FONTANELLA

Kenavo, Amaury ! bez nerz kaloun !!..

AR PRESIDANT

Krogit ennhan !

*(En eur ziskuez an testou)* Goardou, beil-lit varnho !

DE ROMAR

Ne varvi ket da unan !

UNAN EUZ AN TESTOU

Gwal-baket omp, o tont d'e damal !

*Barnerien a testou a ia er meaz.*

*Klevet a reer :*

Ar maro, ar maro d'an trubard !

V

AMAURY ; JEAN ; MICHEL ; DE ROMAR

JEAN

Ah ! Amaury, roit d'in ar pardoun ! na ran-galoun a ra kement-ma d'in !

AMAURY

Ne m'euz droug ebed ouzoc'h, Jean ! N'o

peuz great nemet o tever. Pell 'zo e lien beza anavezet kement-ma ! Dallet oan gant ar garantez evit va breur. Mez, en eur glevet o mam o rebech deoc'h ne reac'h ket o tever, va daoulagad 'zo digoret. Ah ! perag ivez e m'euz-me karet kement-ze Fontanella !... mez breur oa d'in, ia va breur oa !! A pa velan oun eat beteg o lakaat da zilezel o kenvroiz, beteg zoken o lakaat da goll doujans evit o mam... Ah ! nan, morse, morse ne gollin ar zonzj euz an traou-ze. Ne ket d'in-me, Jean, mez deoc'h eo rei ar pardoun.

JEAN, *oc'h asten e zourn*

Oh ! Amaury !

AMAURY, *da Vichel*

En o kenver-c'houi ivez, Michel, oun bet displeal. Klasket e m'euz lakaat Jean da goll ar fizians en doa ennoc'h. Mez, ne anavezen ket o poaniou, na re o kenvroiz ; ato va breur en deuz o c'huzet diouz-in.

MICHEL

An traou-ze oll, aotrou Amaury, a zo ankounac'heet. Ne zalc'homp mui envor nemet euz eun dra, euz o karantez birvidik evit o preur Fontanella.

*De Romar a zeu.*

DE ROMAR, *da Jean*

Eur ger epken, Jean.

JEAN

Petra 'zo 'ta, De Romar ?



DE ROMAR

Daoust a kaloun o peuz-c'hui evit difen oc'h enor, evel ar c'habiten Villerouault, o tad ?

JEAN

Kaout a ra d'in, De Romar ; mez petra glaskit ouz'in ?

DE ROMAR

Anavezet mad e m'euz o tad. Ne grene ket dirag klezeier noaz. An disterra dismegans great varnan, a rea d'e gleze sevel kouls lavaret e-unan euz ar feur. Ag euz ar memez tremp eo o kleze c'houi, Jean ?

JEAN

Taolit evez, De Romar, rag gant dir-mad eo great ivez. Dreist-oll, eur pennadik amzerzo e m'euz desket d'ezan kas divar e dro ar brabanserien fougeuz.

DE ROMAR

Touchantik, ni velo euz petra oc'h gwest.

*(Sevel 'ra e zourn evit skei — Michel, a grok enghan).*

MICHEL

Adre !

AMAURY

Petra rit 'ta, De Romar ? A kredi-raffac'h dirag va daoulagad....

DE ROMAR

A ne zonzit mui, Amaury, eo lazet enep peb gwir o preur Fontanella, kollet oc'h enor

ag hini o merc'h Lena ; eo red venja o famil ?

AMAURY

Va famil ne deuz ezoum euz den evit difen e gwirion ag e enor. A selaouit mad va c'homzou : daoust a va breur en deffe great eur rebech bennag d'ar re en tamalle gant guirionez a gant lealdet ? Lena a me, guir eo, a zo karget a anken ag a dristidigez ; mez fazia ' rit o kredi e c'helloc'h o renta euz a laouen, en eur skuil goad ag oc'h ober goul-drouzou nevez.

DE ROMAR

A red e vezo deomp-ni kredi e klask brema Amaury mont a du gant müntrer e vreur ?

AMAURY

Roit peoc'h, De Romar ! Amaury a anavez e zever a n'en d'euz ezoum euz den evit deski petra ober. Dizroit d'ar gear, a selaouit mad, en em gargan va-unan euz va enor, ag euz enor va merc'h Lena.

*(De Romar a ia er meaz)*

VI

DE ROSMADEC ; JEAN ; AMAURY

DE ROSMADEC

Edou euz o klask, Jean.

JEAN

Petra 'zo 'ta, Aotrou de Rosmadec ?



DE ROMAR

Daoust a kaloun o peuz-c'hui evit difen oc'h enor, evel ar c'habiten Villerouault, o tad ?

JEAN

Kaout a ra d'in, De Romar ; mez petra glaskit ouz'in ?

DE ROMAR

Anavezet mad e m'euz o tad. Ne grene ket dirag klezeier noaz. An disterra dismegans great varnan, a rea d'e gleze sevel kouls lavaret e-unan euz ar feur. Ag euz ar memez tremp eo o kleze c'houi, Jean ?

JEAN

Taolit evez, De Romar, rag gant dir-mad eo great ivez. Dreist-oll, eur pennadik amzerzo e m'euz desket d'ezan kas divar e dro ar brabanserien fougeuz.

DE ROMAR

Touchantik, ni velo euz petra oc'h gwest.

*(Sevel 'ra e zourn evit skei — Michel, a grok enghan).*

MICHEL

Adre !

AMAURY

Petra rit 'ta, De Romar ? A kredi-raffac'h dirag va daoulagad....

DE ROMAR

A ne zonzit mui, Amaury, eo lazet enep peb gwir o preur Fontanella, kollet oc'h enor

ag hini o merc'h Lena ; eo red venja o famil ?

AMAURY

Va famil ne deuz ezoum euz den evit difen e gwirion ag e enor. A selaouit mad va c'homzou : daoust a va breur en deffe great eur rebech bennag d'ar re en tamalle gant guirionez a gant lealdet ? Lena a me, guir eo, a zo karget a anken ag a dristidigez ; mez fazia ' rit o kredi e c'helloc'h o renta euz a laouen, en eur skuil goad ag oc'h ober gouldrouzou nevez.

DE ROMAR

A red e vezo deomp-ni kredi e klask brema Amaury mont a du gant müntrer e vreur ?

AMAURY

Roit peoc'h, De Romar ! Amaury a anavez e zever a n'en d'euz ezoum euz den evit deski petra ober. Dizroit d'ar gear, a selaouit mad, en em gargan va-unan euz va enor, ag euz enor va merc'h Lena.

*(De Romar a ia er meaz)*

VI

DE ROSMADEC ; JEAN ; AMAURY

DE ROSMADEC

Edou euz o klask, Jean.

JEAN

Petra ' zo 'ta, Aotrou de Rosmadec ?



DE ROSMADEC

Ar Roue, o c'houzout edoc'h e Paris, en d'euz va c'harget euz eur gefridi en o kenver.

JEAN

Ar Roue ' zo re vad. — Petra 'ta a c'houlen ?

DE ROSMADEC, *da Amaury*

N'am zamallit ket, Amaury, ma rankan lavaret kement-ma dirazoc'h.

*Da Jean.* Ar Roue en deuz va fedet da lavaret deoc'h oc'h anvet gouarnour Douarnenez, a kabiten ar Ponte-Kroaz.

JEAN

Nan, aotrou de Rosmadec, an henor-ze n'eo na dleet na mad d'in-me. Re a nec'hamant ag a dristidigez a zo brema var-n-oun. Ne glas-kan brema nemet eun tammik peoc'h ag ehan. C'honi a drugarekaio ar Roue euz va ferz, en eur rei dezan da anaout n'ellan kemeret ar garg.

AMAURY

Jean, ne enebit ket ! Nan, abalamour d'ia, m'oc'h euz c'hoaz evidoun eun tammik karantez, digemerit ar garg a ginnig deoc'h ar Roue. Bezit gouarnour o pro ! Grit dezi dizonjal, dre ar peoc'h a dre eurusted, an amzeriou tenval e deuz gouzanvet ; grit ma ne jomo mui, er vro, an disterra envor euz hano va breur Fontanella. A ma teu deoc'h, divezatoc'h, pa ne vezin mui, klevet eur vam bennag o lezel malloziou var Fontanella, aba-

lamour d'o bugale lazet ganthan, lavarit dezho en doa an trubard eur breur, ag a zo bet rannet e galoun abalamour d'e zizurziou. Ia, lavarit d'ho kenvroiz, ne zeus bet e famill gaer Beaumanoir nemet eun trubard, unan epken, Fontanella !

Evidoun-me, brema, a zo o vont d'en em denna e kreiz va douarou, evit mervel e peoc'h, euruz d'ho konta e renk va mignou-  
ned ; euruz ivez, o sonjal e choum gan-en va merc'h Lena evit rei skor d'in em foaniou ag em c'hosni....

A c'houi ivez, Jean, ra roio Doue deoc'h eurusted !

JEAN

A gwest oun-me da veza euruz, Amaury ? Rag me, me va unan eo m'euz o taolet, c'houi ag o merc'h, en dizhenor ag en anken. Penaoz gortoz an eurusted, pa zonjan e tevio Lena, en eur o kwelet, marteze d'am milliga. A kaout a ra deoc'h, Amaury, e taolo varnoun e malloz ?

AMAURY

Nan, nan, Lena n'ho milligo ket. Anaout a ra ar pez o p'euz great evidoun ag evithi. Nan, Lena n'ho tamallo ket da veza skuillet ar vez var e zal a var va hini. Nan, en lavaret e d'euz d'in... brema zoken... evithi da veza kollet peb fizians...

JEAN

Va c'haret a ra !... c'hoant o pefse da lavaret e kar c'hoaz ac'hanoun ?...



AMAURY

Ne dleffen ket beza en lavaret deoc'h. Ne zeus mui fizians ebed. A dizonjal a rit-c'houi, Jean, n'omp mui nemet breur a nizez eun trubard?... a c'houi...!!

JEAN

Me? Mez fellout a ra d'in ober deoc'h honor! Ah! ne lavarit ket ne z'eus mui fizians ebed. Fellout a ra d'in diskuez euz an eil penn d'egile da Vreiz-Izel, n'o deuz nag Amaury nag e verc'h perz ebed e trubarderez Fontanella. Nan, diskuez a rin ne fell ket da vab ar c'habiten Villerouault, e vesse lavaret o deuz Amaury de Beaumanoir ag e verc'h Lena, kollet ho hanò ag ho honor, abalamour en o famill e zeus bet eur « Fontanella ».

(*D'an aotrou de Rosmadec*). It, aotrou de Rosmadec, da lavaret d'ar Roue e kemeran ar garg a ro d'in gant ken bras madelez. Sur e c'hell beza, er servichin gant nerz a gant lealdet.

(*Da Amaury*). Ia, Amaury, dont a ran da veza Gouarnour Douarnenez evit va bro, mez ivez evidoc'h ag evit o merc'h... Lena.

Amaury, sevenit d'ho promessaou, bezit va zad!

AMAURY

A te, Jean, bez va... mab!

(*An eil e divreac'h egile*). Ia, bez va mab, pe gwir e fell d'id karga a laouenedigez va c'haloun glac'haret. Mont a ran da gastel Beaumanoir, da bourchas a da gempen peb tra, da c'hortoz ma tizroi.

JEAN

Ra zeuio an Aotrou Done da skuill var-nomp e vennoz, a bro Kerne a-bez a velo adarre deizioù kaer ag eurüz!

FIN



